

Difennet eo implij ar jederez.

**Taolet e vo pled gant ar reizhskrivadur hag an doare
d'en em zispleg dre-skrid: 4 poent.**

LODENN GENTAÑ : Istor - geografiezh. (18 Poent)

**Pep kandidat a zibabo ur sujed hepken etre an daou kin-
niget.**

Kentañ sujed.

Unvaniezh Europa: un ensavadur galloudus-bras ?

Dielloù.

Diell niv. 1.

Unvaniezh Europa: un taol lañs war-raok.

Ur bazenn a bouez eo bet ar bloavezh 1999 evit Unvaniezh Europa. Un taol bras eo bet embann ofisiel an Euro, d'ar c'hentañ a viz Genver, e-barzh unnek deus ar pemzek bro ezel en Unvaniezh. Daoust ma ne vo ket cheñchet ar bilhedoù-bank hag ar pezhioù moneiz arak ar bloaz 2002 eo deuet tachenn an Euro da vezañ un dra fetis a rank ar gouamamantoù derc'hel kont anezhi.

Koulskoude e tiskouez an tabut a zo etre Breizhiz-Veur ha Luksembourgiz diouzh un tu, hag Europeiz all diouzh an tu all, pegen diaes eo lakaat ar politikerezhioù ekonomikel ha budjetel da genglotaat.

Abalamour da gresk niver ar broioù ezel en Unvaniezh en em gaver neoazh rediet da adkempenn an ensavadurioù d'en em harpan warno da ren Europa pa vo 20 pe 25 bro ezel enni. Kroget eo an Unvaniezh da sevel ur sistem difenn emren en ur ziviz pep tra evit ma vefe tu sevel ur strollad 60 000 soudard. Dalc'hmat e chom an N.A.T.O. aozadur brezel pennañ ar c'hevandir, ha dalc'hmat e vez gouarantet surentez an holl vroioù gant ar Stadoù-Unanet. Met fellout a ra d'an Unvaniezh bezañ gouest da lakaat urzh war he zachenn kenkas e savfe bec'h e komadoù zo anezhi, evel er C'hosovo.

Ouzhpenn-se eo deuet a-benn ar pemzek, goude bloavezhioù kenlabour start, da lakaat Europol da vont en-dro : setu e labouro an holl servijoù polis broadel emglevet a-enep an torfetourien hag an trafikerien arc'hant lous.

Diwar H.de Bresson, « Bilan économique et social 1999 », Le Monde, janvier 2000.

Diell niv. 2

Kenwerzh hollvedel e 1998.

Ezporzhiadurioù dre dakad (miliardoù a zollarioù)	An 8 bro kentañ e-keñver % hollad an eskemmoù kenwerzbourel er bed a-bezh.
Europa ar Chornog (*) 2 347	1. Bro Japan 6,1
Azia 1 293	2. Frañs 5,4
Amerika an Norzh 897	3. Stadoù Unanet Amerika 14,8
Amerika ar Su 275	4. Alamagn 9,2
Kreiz ha reter Europa 214	5. Rouantelezh-Unanet 5,3
Reter Tostañ 137	6. Italia 4,2
Afrika « 106	7. Kanada 3,8
(*)Unvaniezh Europa, Island, Norvej, Suis.	8. An Izel-Vroioù 3,5

Tennet eus : Images économiques du monde 2000, Sedes.

Diell niv. 3.

Divaskell aour an Airbus.

Goude 30 vloaz a strivoù, setu Airbus deuet da vout kevezer nemetañ Boeing, ar jeant amerikan. E 1999, evit ar wezh kentañ, eo deuet Airbus zoken da benn a werzhañ muioc'h a nijerezed evit e gevezer staliet e Seattle. An A3XX - a zo dle dezhañ bezañ lakaet en implij a-benn ar bloaz 2005 - a zo graet evit ober koñkurañs d'ar 747, nijerez vrudetañ Boeing.

Ganet eo Airbus diwar labour emglevet etre ar Frañs hag an Alamagn ; goude o deus en em lakaet Breizh-Veur ha Bro-Spagn da genlabourat ganto. Ezel eo Airbus hiziv-an-deiz e-barzh ar strollad european nevez EADS (European Aeronautic Defence Space Community). Ma'z eo perlezenn presiusañ ar strollad european eo ivez an hini vreskañ : ingal e sav bec'h etre an izili lodek en embregerezh, diwar-benn amzer da zont Airbus, peotramant diwar-benn ar feson da ingalañ ar garg labour etre an uzinoù, hervez ar broioù.

Pep unan a zo karget d'ober war-dro un tamm eus ar c'harr-nij : ar c'hockpit d'ar Frañsizion, korf an nijerez d'an Alamaned, an divaskell d'ar Saozon, an driv¹ hag ar stuc'hennad¹ d'ar Spagnoled. E Toulouse, e Frañs, hag e Hamburg, en Alamagn, e vo savet ar c'hirri.

*Temet eus un teuliad savet gant V. Liom
lec'hienn Intemet: <http://vwww.canoë.fr>; 5 a viz Kerzu 2000.
1 : tammoù eus korf ar charr-nij.*

Goulennoù - 8 poent

Goulen 1.

Dielloù niv. 1 ha niv. 3 : 1999 a zo bet ur bloaz a bouez evit Unvaniezh Europa. Petra a bouez 'zo bet graet ar bloaz-se ?

Goulen 2.

Diell niv. 2 : Diskouezit eo bras lodenn Unvaniezh Europa, ha hini ar broioù ezel enni, er c'henwerzh bedel.

Goulen 3.

Dielloù niv. 1 ha niv. 3 : Peseurt diaezamantoù a gaver war hent diorren galloud Unvaniezh Europa ?

Pennad arguziñ. 10 poent.

Savit — gant skoazell titouroù tennet deus an dielloù hag ar pezh ho peus desket — ur pennad arguzennet o respont d'ar goulen-mañ : «Hag-eñ eo Unvaniezh Europa un ensavadur galloudus-bras ?» (Tro 20 linennad).

Eil sujed.

Ar Frañs e-barzh enkadenn ar bloavezhioù 30

Dielloù.

Diell niv. 1.

Prederiet eo Charles de Gaulle gant stad arme Bro-Chall

Desket e voe e miz Du 1934 e voe savet an tri Panzerdivizion¹ kentañ gant ar Reich [...] E miz Meurzh 1935 e tisklerie Goering² e oa ar Reich o sevel un aerlu galloudus-tre, gant kalz kirri-nij chaseal, kirri-nij bombezañ hag, ouzhpenn da-se, un niver bras a girri-nij arsailh. Padal, daoust d'ar muzulioù-se terriñ splann hag anat ar feur-emglevioù etrevroadel, ne rae ar Bed Dieub ken tra a-enep nemet goulenn digant Kevredigezh Ar Broadoù (SDN) sevel he mouezh da brotestiñ.


Ne oan ket evit andur gwelout an enebour da zont o sevel hag o c'hounit peadra da vezañ trec'h deomp pa ne rae ket ar Frañs ar memes tra [...] Ar jeneral Debeney, anezhañ ur pennarme gloriüs eus ar brezel bras, a zalc'he da embann gouziek e kavfe n'eus forzh peseurt brezel en Europa e zisoc'h diwezhañ war hon harzoù-ni er Biz ; ne oa enta netra arall d'ober nemet diwall start an harzoù diouzh an tu-se. Ne wele ket perak e vefe bet ret cheñch tra pe dra.

Charles De Gaulle Mémoires de guerre, tamm 1^{añ} Plon, 1954.

1 Panzerdivizion : rann-arme kirri-arsailh (tankoù).

2 Goering: ministr alaman an aerlu.

Diell niv. 2.



Emdroadur an oberiantiz hollek (merk 100 e 1928)

produadur industriel

oberiantiz (niver a eurvezhioù labour)

ezporzhiadurioù traoù fardet

P. Milza ha S. Bernstein, Istor an XX^{vet} kantved, Kentañ levrenn, Hatier 1994

Diell - niv. 3.

Testeniñ ur micherour eus un uzin Citroën, mare gouarnamant Talbenn Ar Bobl

Gounit a raen gwelloc'h ma buhez e Pariz eget e lec'h all. Gounit e vuhez a zo a bouez. Aesaet e oa bet stad ar vicherourien gant lezenn an 40 eurvezh labour ar sizhunvezh, gounezet a-drugarez da stourm ar sindikadoù unanet. Micherourien yaouank an uzinoù, deuet da vezañ kaeroc'h eget kent, speredekoc'h, buhezec'h a heje diwar o divskoaz pouez drastus ha bac'hus al labour en ur c'hoari er-maez, en ur vont da gampiñ ; a-drugarez d'an 40 eurvezh atav. Daoust d'ar skuizhder a santen ur wezh achuet ma devezh labour ganin e seblante an uzin din bezañ lodek dija en ur bed nevez, en ur bed laouenoc'h.

G. Navel, Travaux, Stock, 1945.

Goulennoù - 8 poent.

Goulenn 1.

Diell niv. 1 : Petra, o tonet eus an diavaez, a laka ar Frañs en dañjer ?

Goulenn 2.

Dielloù niv. 1 ha niv. 2 : War wanaat ez a ar Frañs er bloavezhioù 1930-1939 ; koll a ra lañs.
Menegit ar sinoù a ziskouez kement-se en dielloù-mañ.

Goulenn 3.

Diell niv. 3 : Petra en deus cheñchet e stad ar vicherourion, hervez an hini a gomz ?

Pennad arguziñ - 10 poent

Savit - gant skoazell titouroù tennet deus an dielloù hag ar pezh ho peus desket - ur pennad arguzennet war an danvez-mañ : «Ar Frañs e-barzh enkadenn ar bloavezhioù 30». (Tro 20 linennad).

Eil lodenn : deskadurezh keodedel (12 poent)

Sujed : Penaos e vev an demokratelezh e Frañs a-drugarez d'an dud o kemer perzh er vuhez politikel ha sokial.

Dielloù

Diell niv. 1. Paperenn strevet gant ur strollad politikel : hini ar Re Chlas (= An ekolojisted).



**Ur vuoc'h ?
n'eo ket vat !...**

Enkadenn ar vuoc'h-sot 'zo hini produktivism al labour-douar da gentañ-penn. Ar broduktourien vras eo, dreist-holl, ar re a denn ar muiañ a vad eus ar yalc'hadoù, arc'hant roet gant Europa hiziv an deiz. Sevel loened-korn betek re a zo bet mont gant un hent dall ; hag an hent dall-se en deus kaset lod betek ar soñj magañ debren-geot gant bleud fardet diwar korfoù loened marv malet.

Netra sotoc eget ar politikerezh labour-douar-se. Kinnig a ra ar Re C'hlas treiñ kein dan doareoù-se evit mont, hep koll amzer, davet ut labour douar padus.

Ret eo sikour al labour-doua'r bio.

Ret eo krennañ ar yalc'hadoù arc'hant hag o ingalañ gwelloc'h en ur harpañ da gentañ an tiegezhoù bihan, ar re a ra ar muian an dorn evit kempenn an tiriegezh.



Diell niv. 2 - Tud. o sevel a-enep ar marc'had hollvedel digor : Pariz , 1999.

En desped. d'ar vrud vat a vez gant ar manifestadegoù a-enep ar marc'had hollvedel digor ne vez ket kement-se a dud o kemer perzh enne. «An taol-mañ ez eus atav brud ganeomp, ha tud zo deuet, war ar marc'had ! » Laouen-bras eo Christophe Aguiton, unan eus animatourien ar gevredigezh ATTAC¹.

Bale a ra Corinne a-hed ar vanifestadeg. Mestrez-skol eo-hi e departamant an Oise; deuet eo da Bariz da ziskouez eo a-unan gant tud all ha da c'houlenn e vefe rannet gwelloc'h ar pinvidigezhioù tro ar bed.

Ar strolladoù politikel o deus kenaozet ar vanifestadeg a zo en o bleud, stad enno ; da gentañ tout ar Strollad Komunour Gall (PCF) gant e sekretour meur deuet war an dachenn. Distag a ra Robert Hue komzoù arguzennet da harpañ e c'hoant gwelet sevel « un aozadur kenwerzhorel hollvedel hag a vefe demokratel, hag a leskfe gant ar geodiz ar gwir da lavarout o soñj ». E-mesk izili ar Strollad Komunour Dispac'hour ne glever komz nemet eus kudenn labour ha dilabour «E-barzh ti Michelin, ha kenkoulz evel e Seattle, eo arabat e vefe lezet an embregerezhioù liesvroadel d'ober o soñj », eme ar strollad-se; ha padal e talc'h ar Re-C'hlas da gas o stourm dezho war dachenn an ekologiezh: «Emañ an dour etre daouam Vivendi²; pegoulz e vo privatizet an aer ? »

Difenn ar gwirioù sokial hag ar servij publik : setu ar pezh a gaver e-touez prederioù pennañ ar sindikadoù, ar CGT, an FSU, ...

Hervez P. Masson, «meur a zek miliad tud en em vodet disadom a-enep d'ar marc'had hollvedel e 80 kêr», L'Humanité, an 29 a viz du 1999.

- 1. ATTAC : Association pour la taxation des transactions financières et pour l'aide aux citoyens
Kevredigezh a c'houlenn ma vo takset an eskemmoù arc'hant ha sikouret ar geodiz.*
- 2. Vivendi : un embregerezh industriel vras.*

Diell niv. 2. Pennadoù tennet eus Disklêriadur hollvedel gwirioù mab-den

Pennad 20 - 1 Pep den en deus ar gwir d'en cm vodañ ha d'en em gevredañ e peoc'h gant tud-all.

Pennad 23 - 4 Pep den en deus ar gwir da sevel sindikadoù gant tud-all ha da lakaat e anv e-barzh sindikadoù evit en em zifenn ha difenn e vadoù.

Goulennoù - 4 foent

Goulenn 1 Diell niv. 1 War beseurt kudennoù e klask ar strollad politikel sachañ evezh an dud?

Goulenn 2 Diell niv. 1 Petra a ginnig ar strollad ober evit diskoulmañ ar c'hudennoù-se ?

Goulenn 3 Diell niv. 2 A-enep d'un darvoud a-vremañ e sav ar vanifesterien o mouezh. A-enep da behini ?

Goulenn 4 Diell niv. 2 : Pevar seurt tud a gaver o kemer perzh er vanifestadeg ; pere ?

Goulenn 5 Dielloù niv. 2 ha niv. 3 : Peseurt gwirioù ha frankizoù embannet e Disklêriadur hollvedel Gwirioù Mab-den emañ ar vanifesterien o sevenin ?

Pennad arguziñ - 8 poent.

Savit - gant skoazell titouroù tennet deus an dielloù hag ar pezh ho peus desket - Ur pennad arguzennet war an danvez-mañ : «Penaos e vev an demokratelezh e Frañs a-drugarez d'an dud, o kemer perzh er vuhez politikel ha sokial. (Tro 20 linennad),.

Taolit evezh : arabat disoñjal reiñ ar follenn-mañ en-dro ur wezh leuniet.

Teirvet lodenn: Kavout e verkoù en amzer

1.- E peseurt bloavezh e oa deuet Hitler da vout kanseller Alamagn ?

2.- Ur monumant savet e Aten a zegas soñj diouzhtu eus ar mare, en Henamzer, ma oa ar gêr-se en he brud. Pehini eo, hag e peseurt kantved e oa bet savet ?

.....

3.- Pevar Stad ezel eus Unvaniezh Europa a zo bevennet gant ar Mor Kreizdouar.
Skrivit o anvioù war ar gartent, hag ivez anv kêrbenn pep unan anezho.

